

egat - pe Agapit.
Honneur - Bodou.

KANTIK

SANT EGAT A SANT SATURNIN

MERZERIEN

WAR DON : *Goude bezan communiel.*

DISKAN.

Sant Egad ha sant Saturnin, pedet evit Pleuveuris,
 Disket dezo karout Doue, ha sentin ouz an Ilis.
 Ho puez leun a vertuio, d'an oll a so eur skouer vad,
 Hon miret dre ho pedenno, euz pep drouk hag pep stad.

Sant Egad, skouer ar iaouankis, Saturnin, skouer ar gozñ,
 ganet ho daou en kear Rom, ho daou merzeriet en-hi
 relegou, daou c'hant vlaz-so, a so deut en Breiz-Isel
 Gant an aotro Moris ar Gall, d'an ampoent person Servel.

Eun aotro devot ha pinvik, euz parrez Pleuveur-Bodou.
 A c'houlennas digant he vignon eun tam dezuz ho relegou.
 Ar person, ato sikouret gant *Kerisac-Kerzuel*.
 A wir galon 'roaz dean lod euz he denzor santel.

An aotro Balthasar Graugier, eskob santel Landreger,
 Aotrez vit parrez Pleuveur relegou an daou verzer.
 Tud fidel, mignonet d'ar zent, pebez grâs ! mar ho fedet,
 Dre bedenno ar verzerien, c'houi vo bepred sikouret.

Sant Egad, he dad hag he vam iaouankik a neuz kollet,
 Hag en eur vro bell, ugent vlaz, gant tud gouez a neuz bevet,
 Grâs Doue, dre ar vadeiant laktet en he ine,
 Dre ar beden a neuz miret, daoust da skouer fall an arme.

Tud iaouank, ho tud hag ho pro a vo red eun dez kuit
 Evit heuil an dud a vrezel. Ho ped sonj dezuz sant Egad.
 Ivel-han leret a galon : « Me vo fidel da Zoue
 Er c'hasern evel em farrez, en pep bro, hed ma bue.

Oll vugale Vreiz er skolio a ve breman dastumet,
En darn anezho, siouez ! neo mui an Aviel 've disket.
Gwal-vrezel d'ar skolio kristen, a ve gret gant tud dife,
Sant Egad, deuz gwal gentelio, diwallet hon bugale.

Mistri Rom, d'amzer Saturnin, d'ar gristenien 're brezel
Red e oa dianzav Jesus, pe en tourmancho mervel.
Saturnin, distag euz ar bed, he galon oll da Zoue
Na zoujas ket, en he gosni, n'ag an tan n'ag ar c'heze,
Kaëran kentel neuz Saturnin roet d'eomp o skul he wad !
Kentoc'h evit koll grâs Doue, 'vit Doue kollomp pep mad.
Evit gwir, enor ha mado, n'int netra nemed môged,
Eskoaz ar vuez eternal, d'eomp gant Jesus prometet.

War skouer Egad ha Saturnin, mar c'hoantât lod en ho gloar
Distaget speret ha kalon euz oll vado an douar,
Karet Doue, sentet out-han, n'em viret deuz ar pec'het,
Ha goude poanio ar bed-man, c'houi 'vo gante kurunet.

PERSON PLEUVEUR.

*Ann hini a gano ar c'hantik-man enn Eskopti Zant-
Briec gant gwir doujanz Doue, a choneo daon-ugent
devez a induljanz.*

ZANT-BRIEC, AR C'HOUEC'H WAR-N-UGENT A VIZ EOST 1887.

† EUGÈNE-ANGE-MARI,
Eskop a Zant-Briec hag a Dreger.

Landreger, en ti Ar Flem, Mouller ann otro'n Eskop.